


diskouezadegoù - sonadegoù - prezegennoù - sinema
expositions - concerts - conférences - cinéma

KREIZENN SEVENADUREL BREIZHEK

YEZHOU HA SEVENADUR

CENTRE CULTUREL BRETON DE SAINT-HERBLAIN



PROGRAMM SEVENADUREL

Miz Genver - Miz Even 2026

PROGRAMME CULTUREL

Janvier - Juin 2026

Réalisation : Audrey Kiefer

Photographie : Laurent Lavedet



Roll an abadennoù / Sommaire

JEUDI 15 JANVIER - 19:00

p.10

Vernissage de l'exposition "Balade étoilée en Finistère" par Laurent Laveder.



MARDI 10 FÉVRIER - 20:00

p.11

Autour de la bande-dessinée "Jozé" de Christophe Lelu.



MARDI 3 MARS - 20:00



p.13

Conférence de Rozenn Milin consacrée à la langue bretonne.



MARDI 10 MARS - 18:30

p.14

Présentation du livre collectif "Kezeg an heol".

JEUDI 19 MARS - 20:00



p.15

Conférence sur l'astronomie par Dominique Merien.

JEUDI 26 MARS - 20:00

p.16

Fentlinenn 3 : du jeu video en breton.



MARDI 31 MARS - 20:00



p.17

L'avenir de la langue bretonne & le défi 1000 familles.

MARDI 7 AVRIL - 20H

p.19

Vernissage "10 ans d'expositions à l'Angevinière".

VENDREDI 10 AVRIL - 20:00

p.20

Trouz' zo ar bed : scène ouverte internationale.



MARDI 28 AVRIL - 20:00

p.21

Concert Hamon - Martin.



MARDI 12 MAI - 20:00

p.22

Soirée des fiertés : cinéma rencontres.



MARDI 16 JUIN - 20:00

p.23

Soirée Celtomania : concert Le Normand / Goudédranche.



WEEK-END DU 12 & 13 JUIN

p.24 - 25

Les 20 ans de Yezhoù ha Sevenadur.



Soirée en langue bretonne avec traduction simultanée en français



Gouloù 'zo
Les marchés de l'Angevinière

*Soirées Gouloù 'zo en partenariat avec
l'Agence Culturelle Bretonne de Loire-Atlantique
et AlterNantes FM*



*Grande soirée de présentation de la
programmation du festival Les Celtomania*

Pennad-stur

2006 - 2026

2006-2026 : Lidet e vo 20 vloaz Yezhoù ha Sevenadur er bloaz-mañ. Muioc'h c'hoazh 10 vloaz zo eo en em staliet hor c'hevredigezh e bali an Añjevinier, pezh zo bet ur bazenn a-bouez evit he diorren. Evit lidañ an deiz-ha-bloaz-mañ evel m'eo dleet, e vo aozet un diskouezadeg kilsell ispisial hag ur gouel bras d'ar Gwener 12 ha d'ar Sadorn 13 a viz Even.

Framm krouet da gentañ evit harpañ krouidigezh ar skolaj Diwan eo deuet Yezhoù ha Sevenadur da vezañ 20 vloaz diwezhatoc'h ur greizenn sevenadurel dibar e Breizh, enni div skol, ur vagouri, daou radio, ur vediaoueg, kentelioù-noz, ur stummadur hir, ouzhpenn 150 bugel ha 40 goprad a zesk, kelenn, labourat ha bevañ bemdez e brezhoneg. En distro-skol hon eus degemeret daou framm nevez zoken : ar greizenn-dudi evit ar vugale Patati hag Ofis Publik ar Brezhoneg.

Yezhoù ha Sevenadur a zo ivez ur greizenn sevenadurel gouestlet d'ar vro ha d'he yezh a ginnig peder diskouezadeg hag ouzhpenn 20 abadenn a bep seurt e-pad ar bloaz, prezegennoù, sonadegoù, leurennoù digor, skignañ filmoù...

E deroù ar bloaz-mañ e vimp laouen-bras o vezañ war skritell eil dalc'h ar festival "Eus an douar d'ar stered" asambles gant ar planetarium, gant diskouezadeg an astro luc'hskeudenner eus Penn-ar-Bed Laurent Laveder.

Un istor pinvidik a ya war-raok c'hoazh, gant ur vuhez kevredigezhel birvilh ha raktresoù sevenadurel e-leizh. Koulskoude e chom bresk an traoù. Ezhomm hon eus eus ho skoazell.



Éditorial

2006 - 2026

2006-2026 : Yezhoù ha Sevenadur célèbre cette année ses 20 ans d'existence. Pour célébrer cet anniversaire, nous prévoyons une exposition rétrospective ainsi qu'une grande fête le vendredi 12 et le samedi 13 juin.

Structure originellement fondée pour soutenir la création du collège Diwan, Yezhoù ha Sevenadur est devenue 20 ans plus tard un centre culturel unique en Bretagne abritant en son sein deux établissements scolaires, une crèche, deux radios, une médiathèque, des cours du soir, une formation longue intensive à la langue bretonne, plus de 150 enfants scolarisés et 40 salariés qui apprennent, enseignent, travaillent et vivent tous les jours en langue bretonne. Preuve que notre projet est plus vivant que jamais, nous avons accueilli deux nouvelles structures cette année : le centre de loisirs pour enfants Patati, et l'Office Public de la Langue Bretonne.

Yezhoù ha Sevenadur, c'est aussi un centre culturel consacré à la Bretagne et à sa langue qui propose chaque année quatre expositions et plusieurs dizaines d'événements divers : conférences, concerts, scènes ouvertes, projection de films... En ce début d'année, nous aurons le grand plaisir d'être à l'affiche de la seconde édition du festival "De la terre aux étoiles" en partenariat avec le planétarium de Nantes, grâce à l'exposition de l'astrophotographe finistérien Laurent Laveder.

En un mot, une riche histoire, une progression constante jamais démentie et une vraie vitalité des associations et du projet culturel. Pourtant, la situation reste fragile. Nous avons besoin de votre soutien.





DISKOUEZADEGOÙ EXPOSITIONS

07/01 - 31/03/2026

LUC'HSKEUDENNOÙ
PHOTOGRAPHIES

Baleadenn steredek e Penn-ar-bed
Balade étoilée en Finistère



An astro-luc'hskeudenner Laurent Laveder a foet Penn-ar-Bed diouzh an noz evit tapout gweledvaoù gant an hent-sant-Jakez, ar stered pe al loar en adreñv.

Da-geñver eil dalc'h ar festival "Eus an douar d'ar stered" aozet gant planetarium Naoned omp laouen o kregiñ 2026 gant an diskouezadeg hollgaer-mañ evit dizoleiñ Penn-ar-Bed dindan an astroù.

L'astrophotographe Laurent Laveder arpente le Finistère de nuit pour capturer des paysages avec la voie lactée, les étoiles ou la lune à l'arrière-plan.

Dans le cadre de la seconde édition du festival "de la terre aux étoiles" organisé par le planétarium de Nantes, nous sommes ravis de démarrer 2026 avec cette magnifique exposition à la découverte du Finistère sous les astres.

Vernissage le 15 janvier à 19h00 - page 10

Avec le planetarium de Nantes et le festival "de la terre aux étoiles" 7

07/04 - 30/06/2026

KILSELL
RÉTROSPECTIVE

2016 - 2026

10 ans d'exposition à l'Angevinière



Abaoe lid-digeriñ an diskouezadeg kentañ gouestlet d'an arzour Jean Minguan e miz Du 2017, ez eus bet dalc'het 25 diskouezadeg e Yezhoù ha Sevenadur. Un dek vloaz bennak a ziskouezadegoù diwar sevenadur Breizh en e holl zoareoù. Evit lidañ an deiz-ha-bloaz mañ omp laouen o kinnig deoc'h an "diskouezadeg diskouezadegoù"-mañ a vod oberennoù ur pemzek diskouezadeg heverk eus an 10 vloaz-mañ.

Depuis le premier vernissage de l'exposition Jean Minguan en novembre 2017, ce sont pas moins de 25 expositions qui se sont succédé à Yezhoù ha Sevenadur ! Une décennie d'expositions au service de la culture bretonne sous toutes ses facettes. Pour célébrer cet anniversaire, nous avons le plaisir de vous proposer cette "exposition des expositions" qui rassemble les œuvres d'une dizaine d'expositions marquantes de ces 10 années.

Avec la médiathèque KDSK / OPAB, Centre de ressources culturelles celtiques.



DARVOUDOÙ ÉVÉNEMENTS

YAOU 15 a viz GENVER

JEUDI 15 JANVIER - 19:00

Vernissage & concert - Lid-digeriñ & sonadeg



Lid-digeriñ ha sonadeg

Vernissage et concert

Laurent Laveder et le duo “un violoncelle en Bretagne”




Da-geñver lid-digeriñ diskouezadeg Laurent Laveder omp laouen o kinnig, gant ar festival ar Zef et mer, sonadeg an daouad “Ur violoñsell e Breizh” gant ar sonerez piano Florence Pavie hag ar soner violoñsell Aldo Ripoché. Ur veaj dre zouaroù Breizh, en enor da sonaozer.ezed.ienn klasel meur a vro. Un dastumad puilh a ganaouennoù hengounel dañsoù kavelligoù ha tonioù strobiniellus.

À l’occasion du vernissage de l’exposition de Laurent Laveder, nous aurons le plaisir de vous proposer, en partenariat avec le festival les Zef et Mer, un concert du duo “Un violoncelle en Bretagne” avec la pianiste Florence Pavie et le violoncelliste Aldo Ripoché. Un voyage musical à travers les terres bretonnes, en hommage aux grands compositeurs classiques de la région. Un répertoire riche de chansons traditionnelles, de danses, de berceuses et de mélodies envoûtantes.

MEURZH 10 a viz C'HWEVRER

MARDI 10 FÉVRIER - 20:00

Kejadenn & kaozeadenn - Rencontre & causerie



Gou loù 'zo
Les mardis de l'Argemière

“Jozé” : BD de Christophe Lelu

Avec l'auteur C. Lelu et Yves Bourdaud



José eo istor un tad, ganet "poule de hae" evel ma vez lavaret e gallaoueg e 1931, da lavaret eo "ur bastard", n'en deus ket bet ur yaouankiz aes war ar maez e Montauban Breizh d'ar mare-se.

Korvoerezh patromed ar menajoù, pouez ar relijion, direizhder an arme, stad an enbroad breizhat e Pariz... N'eus skoilh ebet a zo re bounner d'ar peizant breizhat bihan-se. Dont a raio Christophe Lelu da ginnig al levr-mañ en enor d'an tad dianket ken awenus-se.

José, c'est l'histoire d'un père né "poulet de hae" comme on dit en gallo, en 1931, autrement dit "un bâtard" qui n'a pas eu une jeunesse facile dans un monde rural sans concession du Montauban de Bretagne de l'époque.

L'exploitation des patrons de fermes, le poids de la religion, l'injustice de l'armée, la condition de l'immigré breton parisien, ne viendront pas à bout de ce petit paysan breton. Christophe Lelu viendra présenter cet ouvrage en hommage à ce père disparu si inspirant.

Avec Bertègn Galèzz

MEURZH MARS 2026



Dek vloaz bremañ ma vez gouestlet miz Meurzh d'ar brezhoneg e pep lec'h er pemp departamant hag en tu-hont zoken. Er bloaz-mañ c'hoazh e vo Yezhoù ha Sevenadur ha kevredigezhioù all o luskañ ar mizvezh e pep korn Liger-Atlantel .

Bez e vo prezegennoù, lennegezh, istor hag ivez c'hoarioù video ha steredoniezh ! Prouenn evit ar re a defe douetañs e c'hell ar brezhoneg ezteuler pep tra, pe e vefe war dachenn ar skiantoù pe e vefe war dachenn an teknologiezhioù nevez.

Ur prantad eus ar c'hentañ evit deskiñ pe ober gant ar yezh, pe e vefec'h deraouidi, pe deraouidi fals, pe barrek-tre, pe nemet kurius.

10 ans maintenant que le mois de Mars est dédié à la langue bretonne partout sur les cinq départements et même au-delà. Cette année encore, Yezhoù ha Sevenadur et d'autres associations animeront le mois sur l'ensemble de la Loire-Atlantique.

Au programme : conférences, littérature, histoire et même jeux vidéo et astronomie ! Preuve, pour ceux qui en douteraient, que la langue bretonne peut tout exprimer, que ce soit sur le terrain des sciences ou des nouvelles technologies.

Période privilégiée pour découvrir ou pratiquer la langue, que vous soyez débutants, faux débutants confirmés, ou simples curieux.

MEURZH 3 a viz MEURZH

MARDI 3 MARS - 20:00

Prezegenn - Conférence



Ar vezh hag ar c'hastum **La honte et le châtement**

Rozenn Milin



Ar cheñchamant yezh eo unan eus ar cheñchamantoù brasañ a zo bet e Breizh-Izel en XXvet kantved. Penaos ez eus bet gallet mont ken buan gant ur yezh virvidik gwechall ? Petra a oa bet roll ar skolioù hag an hentenoù evel an "aroue", pe "ar vuoc'h" ? Respontet e vo d'ar goulennoù-se gant an istorourez ha kazetennerez Rozenn Milin, en ur gemer harp war videoioù filmet e Breizh hag en Afrika.

L'une des plus grandes mutations que la Basse-Bretagne a connues au XX e siècle est le changement de langue. Comment une langue autrefois florissante a-t-elle pu décliner aussi vite ? Quel a été le rôle de l'école et des méthodes comme le "symbole" ou "la vache" ? C'est à ces questions que l'historienne et journaliste Rozenn Milin répondra en s'appuyant sur des vidéos filmées en Bretagne et en Afrique.



MEURZH 10 a viz MEURZH

MARDI 10 MARS - 18:30

Prezegenn - Colloque



Kezeg an heol

Livre collectif de femmes de Bretagne - Éditions Goater



E Kezeg an Heol merc'hed dilamet, benelouriezh kuzh ? un ugent maouez bennak eus Breizh a gemer istor ha sevenadur Breizh evit adsevel plas ar merc'hed a oa bet kuzh e-pad pell.

Ludsine Briand hag Enora de Parscau div eus an 20 kenaoterez a zeuio da respont da c'houlennoù levrديوù ar Géothèque da-geñver mizvezh ar brezhoneg ha devezh etrebroadel gwirioù ar merc'hed.

Dans *Kezeg an Heol : Femmes effacées, féminismes occultés ?*, une vingtaine de femmes bretonnes s'empare de l'histoire et de la culture de la Bretagne pour restituer la place longtemps occultée des femmes.

Ludsine Briand et Enora de Parscau, deux des 20 coautrices, viendront répondre aux questions des libraires de la Géothèque à l'occasion du mois de la langue bretonne et de la Journée internationale des droits des femmes.

Avec et à La librairie La Géothèque
14 rue Racine à Nantes



YAOU 19 a viz MEURZH
JEUDI 19 MARS - 20:00
Prezegenn - Conférence



Nozvezh Astronomiezh
Conférence sur l'astronomie en breton
Dominique Merien



Abaoc'h 35 bloaz e vez bodet steredoniourien amatour eus Su Penn-ar-Bed gant ar Gevredigezh Astronomiezh Loar Gann.

Dominique Merien ha Christiane Piton, brezhoneger ha brezhonegerez, a vo kinniget ganto ur brezegenn entanus gant, ma 'vo brav an oabl, ur mare evezhiadenn ouzh ar stered. Deuit gant ho kevellunedoù !

35 ans que l'Association d'astronomie Loar Gann regroupe les astronomes amateurs du Sud Finistère. Dominique Merien et Christiane Piton, tous deux brytophones, nous proposeront une conférence passionnante avec, si le ciel le permet, un temps pour observer les étoiles. Apportez vos jumelles !



YAOU 26 a viz MEURZH

JEUDI 26 MARS - 20:00

Nozvezh c'hoarioù video - Soirée Jeux video

Fentlinenn 3



Kalz a Fent Enlinenn : setu an nozvezh "Fentlinenn". Evit an trede bloaz da-heul e teuio Gwen "Tornoz" Meynier, roue ar gaming e brezhoneg, da reiñ lañs d'un nozvezh c'hoarioù video disheñvel diouzh ar re all, gant skipailhoù eus pevar c'horn Breizh o stourm ouzh Geoguessr ha Skribbl.io. Un nozvezh 100% e brezhoneg met digor d'an holl. Er bloaz-mañ e c'heller gwarantiñ an aergelc'h plijus gant skolajidi Diwan.

Beaucoup de "Fent" (amusement) "Enlinenn" (en ligne) : voici la soirée "Fentlinenn". Pour la troisième année consécutive, Gwen "Tornoz" Meynier, roi du gaming e brezhoneg, viendra animer une soirée jeux vidéo pas comme les autres où des équipes des quatre coins de la Bretagne s'affronteront sur Geoguessr et Skribbl.io. Soirée 100% e brezhoneg mais accessible à tout.e.s au vu des jeux pratiqués. Cette année, l'ambiance est garantie avec la présence des élèves du collège Diwan.

Deuit da c'hoari ganeomp ! Venez jouer avec nous !

MEURZH 31 a viz MEURZH

MARDI 31 MARS - 20:00

Prezegenn - Conférence



Dazont ar brezhoneg

Défi 1000 familles

Mazeaz Ar Brun & Visant Roue



Mazeaz ar Brun, un tad yaouank a zesav e vugale e brezhoneg a ginnigo deomp e raktres "difi ar 1000 familh". An difi uhelek-se a respont d'un ezhomm pouezus-bras : adstaliañ ar brezhoneg er familhoù evit ma ne chomfe ket yezh ar skol hepken.

Evit komz deomp eus ar strategiezhioù liesseurt evit advuhezekaat ar brezhoneg e teuio Visant Roue eus Ofis Publik ar Brezhoneg da zegas e vailhoni.

Mazeaz Le Brun, jeune père élevant ses enfants en langue bretonne, viendra nous présenter son projet "défi des 1000 familles". Ce défi ambitieux répond à un besoin essentiel : réimplanter la langue au sein des familles pour que cela ne reste pas uniquement la langue de l'école.

Et pour nous parler des différentes stratégies de revitalisation, Visant Roue de l'Office Public de la Langue Bretonne viendra apporter son expertise.



Hag ouzhpenn-se...

Mais aussi...



Kalz abadennoù all a vo aozet e miz Meurzh e pep lec'h el Liger-Atlantel :

- Atalier gwriat, atalier krochediñ, abadenn c'hoarioù taol, kaozeadennoù ha kejadennoù e brezhoneg e **Sant-Nazer**.
- Atalier keginañ, atalier kanañ, abadenn c'hoarioù taol, kaozeadennoù e **Gwenrann / en Dreball**.
- Atalieroù gant Radio Naoned, atalier war ar c'hompostiñ, tañvadennoù e brezhoneg hag e gallaoueg e **Naoned Meurgêr**.
- Tañvadennoù e brezhoneg hag e gallaoueg, stajoù e brezhoneg e pep lec'h.

Ha tout an dorioù digor skolioù ha skolaj Diwan eus an departamant.

De nombreux autres événements animeront le mois de mars partout en Loire-Atlantique :

- Atelier couture, atelier crochet, atelier jeux de société, causeries et autres rencontres à **Saint-Nazaire**.
- Atelier cuisine, atelier chant, atelier de jeux de société et causeries à **Guérande**.
- Des ateliers avec Radio Naoned, un atelier sur le compostage, des initiations au breton sur la **métropole nantaise**.
- Des initiations en breton et en gallo, des stages en breton un peu partout.

Et toutes les portes ouvertes des écoles et collèges Diwan du département.

Retrouvez tout le programme du mois du breton



mizvezharbrezhoneg44.wordpress.com

MEURZH 7 a viz EBREL

MARDI 7 AVRIL - 20:00

Lid-digeriñ - Vernissage

Diskouezadeg an diskouezadegoù

Retrospective

2016 - 2026



He Yifu, Jean Minguan, Brucero, Gaël Kasprzak, Yann Quemeneur, Gigi Le Merdy, Emmanuel Lepage, Paul Corbineau, Kevredigezh al luc'hskeudennerien.ezed Loened Breizh...

An diskouezadegoù-se ha diskouezadegoù all c'hoazh a vo da zizoleiñ pe da adober anaoudegezh ganto e-pad an diskouezadeg-se. Gant arzourien a-leizh e raimp evel-se un adsell 10 vloaz war lec'hienn an Añjevinier a zo bet graet eus Yezhoù ha Sevenadur, ul lec'h ret-holl evit sevenadur Breizh.

He Yifu, Jean Minguan, Brucero, Gaël Kasprzak, Yann Quemeneur, Gigi Le Merdy, Emmanuel Lepage, Paul Corbineau, l'association des photographes animaliers bretons... Toutes ces expositions et d'autres encore seront à découvrir ou redécouvrir lors de cette soirée. En présence de nombreux artistes, nous ferons ainsi la rétrospective des 10 ans sur le site de l'Angevinière, qui ont fait de Yezhoù ha Sevenadur un lieu incontournable de la culture bretonne.

GWENER 10 a viz EBREL

VENDREDI 10 AVRIL - 20:00

Sonerezh & dañs - Musique & danse



FEST NOZ & LEURENN DIGOR Fest Noz & scène ouverte



An nozvezhioù Trouz 'zo a blij deoc'h ? Trouz 'zo ar bed a blij deoc'h ivez ! Evit al leurenn-digor-se hon eus divizet mont da welet dañsoù ar bed evit an nozvezh etrebroadel.

Meur a gevredigezh eus Sant-Ervlan hag eus ar Meurgêr o deus respontet d'ar galv : berbered, portugaled, serbed... Ar pal : mont da gejañ gant ar re all ha dizoleiñ o sevenadurioù, o muzikoù, o dañsoù, o boued.


Vous aimez les soirées Trouz 'zo ? Vous adorerez la soirée Trouz 'zo ar bed ! Pour cette nouvelle scène ouverte, nous avons décidé d'aller à la découverte des danses du monde pour cette soirée internationale.

Plusieurs associations de Saint-Herblain et de la métropole ont répondu à l'appel : berbères, portugais, serbes... Le but : aller à la rencontre de l'autre et découvrir leurs cultures, leurs musiques, leurs danses, leurs gastronomies.

MEURZH 28 a viz EBREL

MARDI 28 AVRIL - 20:00

Sonadeg - Concert - 10€



Gou loù 'zo
Les mardis de l'Argemière

HAMON - MARTIN



réservation fortement conseillée

N'eo ket mui ret kinnig an daouad Hamon-Martin, strollad a-bouez-tre war leurennoù abaoe 1991.

Er grouidigezh nevez-mañ e vrudont tonioù ar soner Frédéric Lambierge lesanvet Gazman, marvet e 2020. Ur sonerezh fromus ma weler douaroniezh noz Roazhon, kêr e galon.

Pell diouzh ar sonerezhioù mozel, an daouad a glask amañ ur sonerezh disheñvel mik, puilh, subtil, ha fromus.

On ne présente plus le duo Hamon-Martin, formation majeure de la scène bretonne depuis 1991.

Dans cette nouvelle création, ils mettent en avant le répertoire du musicien Frédéric Lambierge dit Gazman, décédé en 2020. Un répertoire touchant où l'on distingue la géographie nocturne de la ville de Rennes, sa ville de cœur.

Loin des musiques modales, le duo se confronte ici à un répertoire différent, aux constructions inhabituelles d'où surgissent des traits mélodiques subtiles et touchants.

MEURZH 12 a viz MAE

MARDI 12 MAI - 20:00

Nozvezh sinema - Soirée cinéma



Nozvezh al loc'h

Soirée des fiertés



Paotred al loc'h ha **Karantez vamm** a ginnig deomp daou goublad, Yann-Bêr ha Fulup ha Lizig ha Rozenn, o vevañ o c'harantez e brezhoneg war ar bemdez. Ar re gentañ a zo bet dimezet e brezhoneg goude al lezenn war an eured evit an holl. An eil re o deus al levenez da vezañ kerent goude un hentad melestradurel hir ha poanius.

Kenlabourat a ra Yezhoù ha Sevenadur gant NOSIG hag ar festival CinéPride evit kinnig deoc'h an nozvezh teulfilm 100% LGBT+ ha 100% e brezhoneg.

Paotred al loc'h et **Karantez vamm**, nous présentent deux couples, Yann-Bêr et Fulup et Lizig et Rozenn. Tous.tes vivent leur amour au quotidien en langue bretonne.. Les premiers se sont mariés en langue bretonne peu après la loi sur le mariage pour tous, les secondes goûtent aux joies de la parentalité après un long et douloureux parcours administratif.

Yezhoù ha Sevenadur s'associe à NOSIG et CinéPride pour vous proposer cette soirée documentaire 100% LGBT+ et 100% e brezhoneg;

MEURZH 16 a viz EVEN
MARDI 16 JUIN - 19:00
Sonadeg - Concert



Nozvezh Celtomania

Soirée Celtomania

Duo Le Normand / Goudédranche



Evit an trede bloavezh da heul vo echuet ar bloaz gant an nozvezh bras ma vo kinniget programm ar festival Celtomania. Un digarez da leuniañ ho teiziataer sevenadurel evit miz Here ha miz Du 2026.

An nozvezh-se, evel ar festival Celtomania, zo bepred un digarez d'ober anaoudegezh gant ur strollad sonerezh nevez. Er bloaz-mañ eo an daouad gant Pierre Le Normand war ar piano ha Benjamin Goudédranche war ar vombard a zeuio da echuiñ ar c'houlzad.

Pour la troisième année consécutive, nous finirons l'année avec la grande soirée de présentation de programmation du festival Celtomania. L'occasion de remplir son agenda culturel pour les mois d'octobre et novembre 2026.

À l'image du festival Celtomania, cette soirée est toujours l'occasion d'une belle découverte musicale. Cette année, c'est le duo formé par Pierre Le Normand au piano et Benjamin Goudédranche à la bombarde qui nous fera l'honneur de clôturer la saison.


DIBENN-SIZHUN 12 / 13 a viz EVEN

WE du 12 et 13 JUIN

LES 20 ANS DE YEZHOUÛ HA SEVENADUR

12/06/2026 - 20:00

Gilles Servat



Ur c'houviad dreistordinal evit un deiz-ha-bloaz dreistordinal !

Ouzhpenn 50 vloaz a verzh o deus graet Gilles Servat unan eus an arzourien hep na vije bet hor sevenadur el lec'h m'emañ hiziv an deiz. Ur vouezh dibar, ur bluenn hollgaer, hag un entan da viken evit Breizh hag he yezh. Gant Gilles Servat e vezomp laouen hag enoret o kinnig dimp ar sonadeg dibar-se evit 20 vloaz Yezhoù ha Sevenadur.

À anniversaire exceptionnel, invité d'exception !

Plus de 50 ans de succès ont fait de Gilles Servat l'un des artistes sans qui notre culture ne serait pas où elle en est aujourd'hui. Une voix unique, une plume magnifique, et une passion intacte pour la Bretagne et sa langue dont il est l'un des plus éminents ambassadeurs.

Gilles Servat nous fait la joie et l'honneur de nous offrir ce concert exceptionnel pour les 20 ans de Yezhoù ha Sevenadur.

13/06/2026 :

Rencontres, spectacles, scène ouverte et concert des Groove Boys



Ret eo lidañ 20 vloaz.

Evit an darvoud-se e vimp laouen o tigeriñ hor dorioù a hed an devezh evit ober anaoudegezh gant Yezhoù ha Sevenadur.

20 ans, ça se fête.

Pour l'occasion, nous sommes heureux d'ouvrir nos portes toute la journée pour découvrir Yezhoù ha Sevenadur.

A hed an devezh - Toute la journée

- Dorioù digor ar c'hevredigezhioù - Portes ouvertes des associations
- Diskouezadeg an diskouezadegoù - Exposition rétrospective

Adalek 4e gm - À partir de 16h

- Kinnigoù ar strolladoù a bleustr bep sizhun e Yezhoù ha Sevenadur - Prestations des différents groupes qui pratiquent toutes les semaines à Yezhoù ha Sevenadur : Pipe Band, danse et musique irlandaise, Swing Coast, Salsa, chorale bretonne.

Adalek 8e noz - À partir de 20h

- Leurenn digor - Scène ouverte fest-noz.
- Sonadeg - Concert : Les Groove Boys.

Hor c'hevelerien / Nos partenaires



**Gant skoazell
Avec le soutien de :**



Trugarez d'an holl frammoù diabarzh, d'an holl c'hevredigezhioù dudi,
d'hon all izili, donezonerezed ha donezonerien ha da g/Katell evit
hec'h adlenn prizus.



**ATELIER IMPRESSION ● MOBILIER
PAPETERIE ● INFORMATIQUE**



ATELIER IMPRESSION



*Impressions · Reliures · Plastifications · Tampons
Grand Formats · Flyers · Cartes de Visite · Objets publicitaires*

Tél : 02 28 07 31 31

254 route de Vannes - 44700 Orvault
Ligne 3 - arrêt de tram Morlière

Horaires : Du Lundi au Samedi de 9h à 19h

Soutenez-nous efficacement

YEZHOUÛ HA SEVENADUR
CENTRE CULTUREL BRETON



don déductible des impôts à 66%



chaque mois

DEVENIR DONATRICE ou DONATEUR

Je souhaite faire un don mensuel au Centre Culturel Breton Yezhoù ha Sevenadur et lui assurer une partie des ressources nécessaires à son bon fonctionnement.

Je souhaite **participer à la vie du Centre**, à son aménagement, aux frais courants, d'entretien ou de programmation culturelle...

Je souhaite **aider au quotidien et à long terme**.

... un don mensuel de 30€ ne vous coûtera à l'année que 122€

... un don mensuel de 100€ ne vous coûtera à l'année que 408€



TRUGAREZ DEOC'H HOLL

Nos besoins sont urgents
Les aides publiques s'amenuisent
Le temps presse



degemer@yhs.bzh
07.50.50.43.58

Arabat stlepel an dra-mañ war an hent - Ne pas jeter sur la voie publique